



Diskouezadeg

Eus al loened d'an dilhad

LIVE 2
ADALEK
7 VLOAZ



2 a viz Even – 31 a viz Kerzu 2023

MIRDI BREIZH AN DEPARTAMANT
KEMPER

Degemer mat en diskouezadeg *Eus al loened d'an dilhad* e Mirdi Breizh an Departamant.


Deñved, moc'h, kizhier, balafenned... Kement a loened a chom kuzhet e dilhad ar vro a veze gwisket 150 vloaz zo.

Penaos `ta ?

- Implijet e veze blev al loened evit sevel dilhad.
- Roet ez eus bet anvioù loened d'an dilhad, pe tresoù pe stummoù loened a veze ganto

A-bouez e oa an dilhad er sevenadur hengounel. A-drugarez d'an tresoù, d'al livioù ha d'ar stummoù e c'helled gouzout eus pelec'h e teue un den, petra e oa he micher, ha pe oad e oa.


Gwelet a ri an dilhad a veze wisket war...



ENKLASK

Gant piv eo bet laeret tok Biskoul ?

Laeret eo bet tok feltr blev avanked Biskoul.
Sikour anezhi da adkavout al laerez !



4 test a zo prest da reiñ dorn dit... en ur mod ! Kinnig a raint dit un dihustell da ziskoulmañ, pezh a roio tro dit da anavezout dilhad al laerez, ha neuze e ouezi piv eo ! : he c'hoef, he felerinenn, he zavañjer hag he botoù. Ha gouest e vi diskoulmañ anezho ?

N'eo ket liammet holl c'hoarioù al levrig-mañ gant an enklask, met ar re a vez gant Biskoul nemetken.

Un nebeud reolennoù a vez doujet outo er mirdi :

- Chom hep tostaat re diouzh an oberennoù
- Chom hep stekiñ diouzh an oberennoù
- Chom hep diskouez un dra bennak gant da greion



Padal, er mirdi e c'hellez :

- Kaout plijadur, ha sellet ouzh an traoù war-ziskouez
- Hunvreal, pourmen, hag ivez dont en-dro
- Sevel goulennoù
- Chom hep gweladenniñ pep tra !





Ur c'hoef a veze war benn ar maouezed 150 vloaz zo. Posupl e oa gouzout eus pelec'h e oant a-drugarez d'o c'hoef. Meur a goef a zo bet roet dezho anvioù loened, rak degas a reont da soñjal el loened-se !

Klask en-dro ar c'hoefoù-se er sal ha skriv anvioù al loened o deus roet o anv pe awenet dre o stumm. Gant o anvioù e vi lakaet war an hent.



TEST NIVERENN 1 :

Ur c'hoef zo gant al laerez... N'eus ket un anv loen gant ar c'hoef-se, met ul loen a c'heller gwelet, brodet war he zaledenn. Klask ar 3 c'hoef a gaver er sal, ha gra ur c'helc'h tro-dro d'an hini a glot gant an diskrivadur.

Skriv pajenn 11 niverenn koef al laerez.



Mat da c'houzout !

Lodenn kein koef bro-Vigoudenn eo an daledenn. Amañ emañ ar vro-Vigoudenn :

Kabelloù a veze gwisket gant ar gwazed ivez : o zok. Tres ur marc'h a c'heller gwelet war unan eus an objedoù a c'hell kinklañ an tokoù-mañ, klask anezhañ.



Skriv amañ anv an objed : _____




Bep bloaz e vez tapet gloan diwar an deñved, ha treuzfurmet e vez d'ober neud a vo implijet a-benn sevel meur a dra : stammet pe gwiadet e vo, evit ober droged pe mezher da skouer.

Nag a gemm etre dilhad Sul hag ur sae stamm gloan peñseliet, a dalveze da gaout tomm da gentañ-penn !


*Klask e-touez an dilhad amañ dindan ha tres ul liamm etrezo hag an doare sevel anezho.
Sikouret e vi gant an displegadurioù war ar panneloù.*



Ar stammenn




An droged



Ar mezher gloan

Al livioù a c'hell bezañ disheñvel diouzh ar re a welez er sal.

Gwechoù zo ez implijer blev loened evit sevel dilhad : gloan an deñved, feur al lapined, blev ar c'hivri...



TEST NIVERENN 2 :

Al laerez he deus gwisket ur pezh dilhad e skoñs.

Klask anezhi e-touez ar 4 tra amañ dindan. Skrivet eo bet danvez pep tamm dilhad war ar panneloù a welez er sal.


Skriv war ar bajenn 11 niverenn pelerinenn al laerez.





Dastumadennoù kregin, koar ar ruskennoù ha kg eskern loened zo, setu traoù bet implijet evit sevel rikoù evit an dilhad : boutonoù, kinkladurioù...

Klask an objedoù-mañ er sal, ha gra ul liamm gant an loened a zo bet implijet evit sevel anezho.



Klask ar pezhioù dilhad breizhek er sal ha liamm anezho gant o broderezhioù.



Tavañjer



Seizenn



Korfenn




TEST NIVERENN 3 :

Gant al laerez e oa gwisket an davanjer-mañ eus bro an Aven.
Gant peseurt danvez eo bet savet ?

Skriv da respont amañ : _____

A=1 B= 2 ...

Gant ar c'hod-se e c'helli kavout an niverenn a glot gant al lizherenn a zo sterniet. Skriv al lizherenn-se war ar bajenn 11.



Evit dilhad an devezhioù gouel e veze brodet tresoù war an dilhad. Gwechoù zo e tenn an tresoù-se ouzh loened zo, pe neuze e vez roet anvioù loened zo dezho : dent bleiz, kerniel maout, drein pesked...



Setu 4 tres, dit-te da genderc'hel an tres. Lak da ijin da vont en-dro ha skriv gant peseurt loened out bet awenet evit an tresoù-se. Evit gwiriañ ma peus kavet ar respontoù mat e c'helli adkavout ar respontoù er sal.



Anv al loen : _____



Anv al loen : _____



Anv al loen : _____



Anv al loen : _____

Mat da c'houzout !

Un tres, pe un dresadenn eo ur broderezh, ha savet e vez gant neud kotoñs pe neud seiz, ha graet gant an dorn pe gant ur mekanik.
Broderazed pe broderien a vez graet eus an dud a vez o vrodiñ.



Botoù-koad a veze gwisket war ar bemdez 150 bloaz zo. Lod a veze fichet gant plouz, doublet gant chaosoniou mezher pe gwisket gant loeroù tev evit kaout tomm ha chom hep kaout poan ivez ! Miret e veze ar botoù-lêr evit an devezhioù gouel.

Setu botoù-koad hag votoù-lêr, sell mat ha gra ur c'helc'h tro-dro d'ar skeud a zere outo.



Anavezet-mat eo broderezhioù Breizh. Awenet eo bet lod eus o zresoù gant loened zo hag o anvioù zo bet roet dezho ivez.

Klask ar re votoù-mañ ha skriv niverenn an tres a weler warno :



TEST NIVERENN 4 :

N'eo hini ebet eus ar re votoù-mañ a gaver er sal a zo e dreid al laerez...

Klask e-touez ar 4 rumm amañ dindan an hini ha n'emañ ket en diskouezadeg-mañ, ha skriv e niverenn : _____

1



2



5



8



RESPONTOÙ

Niverenn dilhad al laerez : _____

Bremañ emañ ganit ar c'hod kuzh evit digeriñ ar c'houfr ez eus ennañ poltred hag anv al laerez.


Met e pe lec'h emañ ar c'houfr-se ?

Kavout a ri anezhañ er sal lec'h m'emañ an dilhad o nijal er vann....



Niverus eo ar vroderezed ha broderien a ro buhez en-dro da dresoù hengounel dilhad Breizh.

Gra un tres war an ti-sheurt amañ dindan, hervez da ijin, o kemer awen digant an anvioù pe an tresoù loened 'peus gwelet en diskouezadeg-mañ.



Deuit d'hon heul ha rannit ho kweladenn war ar rouedadoù sokial.

 [musee.departemental.breton](https://www.facebook.com/musee.departemental.breton)

 [musee.breton](https://www.instagram.com/musee.breton)



Moullerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed
© Empennet gant : Mirdi breizhek an departamant 2023
Luc'hskeudenoù a-drugarez da : Bernard Galéron / Kaset da benn gant : TraductionGrafik
(Affiche, illustrations) : Atelier Bartleby
Imprimerie du Conseil départemental du Finistère